


R I M O U
H A
G O U L E N N O U
E V I T A N E U R E U J O U .

77943



E M O N T R O U L E Z ,
E t i L É D A N , I m p r i m e r , e t r a o n R u a r V u r .



R I M O U ,
DISCOURSIU HA GOULENNOU ,
EVIT AN EUREUJOU.

Discours pa zêr da bedi d'un Eured.

SALUD deoc'h oll , Compagnenez :
Dre ar zalud e meus commancet va devez.
Me a so deut da doull ho tor
Gant calz eus a honor :
Antreet joaus en ho ti
Gant ur c'hoant vras d'ho saludi.
Da Zouc ar zalud humblamant.
Goude me ray va C'homplimant.
Piou eus an ti-màn a bedin-me da guenta ?
Pedi a ràn ar Mestrou ha qement so ennàn :
Mar deus domestiqet en ho ti ,
E o fedàn ive coulz ha c'houi :
Rac re a labour am be
O pedi an eil goude eguile
Da zonet hep fot da ur Banquet
A vezo evidomp prepart
Gant *Mari Lipiq* ha *Yan Baron* ;
Pere ho ped ganeomp-ni a greis calon :
Fixet eo an devez da Zemeurs qenta ;
Rac-se , mar plij ganeoc'h , deut oll da asista ;
En bourg *Plouyan* e vezo an Eured ,
Hac en ti *Flampes* e vo ar Banquet ;
Mar plij ganeoc'h en em gafet ,
Hac e vezimp contant meurbet.
Me ya da gonta deoc'h ar veach :

Dont a refot da da guemeret ar plac'h
 Ac'hane e vezo cunduet d'an Ilis,
 Betec an Auter, evel ma zêo reqis,
 Evit ober ur memes contrat
 Evel m'eure goechal he mam eus he zad.
 Eno neuze e vezint eureujet
 En presañ Doue hac ar Bêleg,
 Hac an oll asistantet,
 Gant solanite ha respet,
 Hac hor Mam Zantel an Ilis.

Cozeomp bremàn gant honestis :
 Me eo an hñni a so choaset
 Da bedi evit ar Plac'h a Eured,
 D'he fedi ha d'he henori,
 D'he aysta da eureuji.
 N'ouzon qet sur a Complimant,
 N'on qet custum da barlant :
 Mes yaouanq on, hac e tisqin :
 Mar plij ganeoc'h va excusin.

*Amàn e peder ar Bederien da antreal en ti,
 ha da zével ous tol.*

AR PLAC'H YAOUANQ.

Silane eta, Compagnunez,
 Ma parlantin evit ar Plac'h a Zevez.

Dre ma savàn abars em za,
 Excus diganeoc'h a c'houlennàn.

Mari Lipiq e deus va fedet
 Da eva nr banne d'he yec'hed.

Peb action gacr pa er gràn,
 Dre Sin ar Groas er gommançàn :

En Hano an Tad, ar Mab, ar Speret Gloan,
 Tri Ferson distinct en unan :

Da Zoue ar zalud da guenta,
 An cil d'an Itron Varia,

An drede d'ar Zent ha d'an Æle,
 Déc'h, Compagnunez honorabl, e presan t'ân'r bêvare.

Evit ar boan oc'h eus bet,
 E zân da réy deoc'h peb a voqet,
 Pini a meus destumet er Jardin a Eden;
 En ur c'haread fleur, pa voan enni o pourmen:
 Da guenta d'ar Vêleyen e roân an bec'herien;
 Dre ma zint o Fastoret hac o Gouarnerien;
 Goude d'an Dud-Jentil ha d'an Noblanç,
 Pa em eus an honor da barlant en o fresanç,
 E roân ar gurunen spern

A zongas Mab Doue p'or prenas eus an ifern,
 Evit ma teuyô da biqat o ene,
 Evit ma vint curius da zouten ar Fe;
 Deoc'h-u, tud demezet, ezac'h ha graguez,
 E roân ar vezen a vuez,

Rac en he deillou me meus bet remerqet
 Ar c'homzou precius eus ar baciantet;
 Ha c'houi, goaset yaouanq, m'o ped da imita
 An Otrou S. Joseph, pa voa var ar bêd-mâ,
 Peini a gunduas epad e oll vuc
 Purete, chastete, temperanç, carante.

Ha ni, merc'het yaouanq, laqomp hor fantasi
 Da henori ar Verc'hes, pini a hanver Mari:
 Imitomp he ferveur; beza e zeo ive
 Rouanes an douar hac an êe.

Me garje beza gallet mont betec Paris;
 Evit disqi deoc'h eus a bep seurt honestis.

Me a so en em véllet hirio a un dra,
 Ha n'en don na gouyapl na capabl anezâ;
 Rac me so ur plac'h yaouanq ignorant,
 Hac e meus nebeut a sqiant:

M'am bije me bet un tam discamant,
 M'em bije têod aoualc'h evit parlant.

Mari Lipiq, mignonet, hirio sur a layar

N'eus nicun er gompagnunez n'e c'har :
 Mes ar re he hencor o tont d'he asista,
 Eus ar re-se sur he deus ar muya joa :
 Hac un all c'hoas a zivisan,
 Ennes sur a gar ar muyan,
 Hac a so dezi ordrenet da garet
 Muyoc'h en amzer da zont eguet en hini tremenet.
 Cetu aman e hano : *Yan Baron* e zêo hanvet.

Arça eta, Compagnunez hencorabl, me ho ped,
 Pa zomp aman oll en em assamblet,
 Un tol chang bras e ve en em gafemp james
 Hep manqout hini ebet assambles :
 Ne meus na pouvoar na gallout
 Da eva ur banne da yec'het pepini ac'hanoc'h tout.
 Mes breman e zan da eva ur bannez
 D'ho yec'hed oll, Compagnunez.

Eva a ra ur banne da yec'hed an Den Yaouanq.

Me a ya brema da eva ur banne
 Da yec'hed an Den-Yaouanq ive :
 Hac evit ma vezo ganeoc'h hanavezet,
Charlezic Mistiflor e zeo partout hanvet.
 Deoc'h-u-ta, *Mistiflor*, brema e roquetan
 A hep seurt madou er bed-man,
 Hac oc'h oll souet var ar bed,
 Mar deo gant Doue destinet.
 Ma vijen bet tenzorieres assuret
 Var an oil denzoriou eus ar bed,
 Eus a netra ne vijac'h bet refusset ;
 Mes Doue en deus hor gouarnet
 Evit beza er bed-mâ meulet :
 Evomp ur banne pepini d'hor yec'hed.

*Discours evit goulen ur Plac'h neve da cureuji,
gant ar respont conform evit ha réy.*

Goulen. Bonjour deoc'h, Compagnunez,
Salud gant laouenediguez;
P'o quelàn aze assamblet,
Dibreder ha brao guisqet,
E credàn oc'h eus anzer
Da zelaou daou pe dri guer.
Ni a so tremenidi,
Carguet eus a gevridi:
Lavarit deomp eta breman,
Peseurt hano he deus ar guer-màn.

Respont. Ni a rent ar memes salud
Deoc'h oc'h-unan ha d'ho tud.
Sansibl omp d'ho complimanchou,
Ha d'oc'h oll reverancou,
Hac hon eus calz a interest
Da zuppozi oc'h tud honest;
Mes mar deo tremen a fel deoc'h,
N'on eus affer ebet ganeoc'h.

G. Ous ho clévet o parlant,
Me gred oc'h eus calz talant;
Hac e velàn ive ractal
E moc'h sur en gout da farçal,
Pa na respontit qet
D'ar pez am eus goulennet;
Mes ni a so deut eus a bel,
Ha mar chomomp discabel,
Ec'h allfemp goude c'hoezi,
Attrap un tam pleurezi.
Rac-se permetit souden
E ve goloet hor penn;
Mar cavit e zeo difêçon,

Pere a aller da evita
 O veva gant grac Doue er bed-mâ.
 Rac Sant Bernard a lavar : n'eus qet a di
 Na zant coulz pe goulz ar voalen a gast ;
 Mes mar bevit en doujauc Doue ,
 Ho pezo pep seurt prosperite.
 Pegnement benac hep douctanc
 Ech ouzoc'h qeiment-se en'avanc ,
 Gant ho permission me lavaro
 En ber instant ur guir pe zaou :
 Qemesqet eo. buez an den
 Bepret gant joa ha gant anqen ,
 An eil a deu goude eguile ,
 Evel ar môr pa deu ar mare ,
 An dud demezet zo ul lest ,
 Exposit da hep seurt tempest ,
 Var ar môr o vagal ,
 Exposit da hep seurt glac'har.
 Gouscoude e seblant d'ar yaouanqis
 Beza qer caer hac ar fourdilis.
 Mes , allas ! en em drompla a reont ,
 Ur boqet spern guen a gavont.
 Evit supporti an infirmite
 A alfe caout an eil hac eguile ,
 Ret eo deoc'h beva en guir union ,
 Ha Doue a roy deoc'h e venediction.
 Peb den zo gant Doue choazet
 Evit beza curys ha salvet.
 Hogen ret eo goude goulen
 Beva just en guir Gristen.
 Contemplit ar societe
 A so entre an donar hac an en ;
 Goulc'ruit bepret digant Doue
 Courach ha nerz d'ho liberte ;
 Evit ober un dra barfet ,

Da renta ar pez a recevlet :

Sonjit e zoc'h pelerinet ,

Da drafica e zoc'h digasset ;

Retorn a ranqit adare

Da renta cont da un Doue.

Gout a rit , ne zouetan qet ,

N'oc'h eus un adversour er bed

An adversour-se eo Satan ,

Sitias deomp oll quitibunan !

Pa falvezo d'an drouc-speret

Dont da dreubachi ho speret ,

Respontit : *Abrenuntio* ,

Ha lavarit : sinet eo ,

An Otrou-Doue eo ar brassa :

Henor ha gloar rentomp dezà.

N'en deo qet plijadur am zouten ,

Comz Doue eo hac e Lezen ;

Respontit : *Abrenuntio* ,

Da guement pec'het ho tento ,

Evit goude beza labouret ,

Hervez ho nerz hac ho yec'het ,

Pa c'hefet divar an douar ,

E recevlet ur gurunen er gloar.

Me a c'houlen ouzoc'h pardon bremàn

Mar d'oc'h choqet gant ar c'homzou-màn.

Cetu an eil gant eguile ,

Evit gloar Doue ha silvidiguez o ene.

Me souhet dê oll graçou Doue ,

Hac a bep seurt prosperite :

Labourat en gloar Doue er bed-mâ deiz ha nos ,

Evit , goude o maro , monet d'ar Barados.

Lavaret en eus Ciceron ,

Mar bevit atao en union ,

E vezot goude curunet

En Rouantelez an Driudet.

Onspen , er goalen a eured
 E zeo ar garante comprenet ;
 Dre ma zeo rond ar voalen ;
 Ne all finissa birviquen.
 Eur garante evel honnes
 Ne all get finissa james.
 Credi a ran oc'h eus pedet
 Jesus hac e Vam biniguet
 Da asista en oc'h euret ,
 En eured Cana , en Galilee ,
 Ec'h asistas e Vam hac én ,
 Demp-ni bremàn , Compagnun ,
 Da ofr hor beden assambles
 Er sacrifice an oferen ,
 Da c'houlèn graçou souveren ;
 Hac evidomp hac evite ,
 Goulennomp graçou ouz Doue ,
 Erfin , o tont da finissa ,
 Dalit he dorn , croguet enna ;
 Prometit dezi fidelite ,
 Hac hi a brometo dec'h ive :
 Cetu aze he dorn deo ,
 Doue dre e c'braç d'o cunduo.

FIN.

